

# Da Zant Per en Ereou Patron Lamber



*Ton : Guir vigale ar Vreizhig  
1<sup>o</sup> air.*

Kenta <sup>\*</sup>Vikel Jezus-Krist, Porzier ar Baradoz,  
Grit ma talc'ho Laniz-Per da feiz ho Zadou koz  
Ho devez ho tibabed etouez Sent an Envou  
'Vit ma vijec'h hor Patron, mirer hon eneou.

Asprened gant-Han an den dre ar maro krissa,  
Salver ar bed a fizias enhoc'h-c'houi da genta  
He Iliz disterik c'hoas, var mor ar bed taoled ;  
Kerkent, a bep tu dezhi ho rouejou ' zo stigned.

En ho pagik burzudus, pesketour eneou,  
E tilamm neuze pesket, pesket a villierou ;  
Varnezhi me ' vel saved kroaz ho Mesr' benniget :  
Porz an Envou d'an dud vad breman ' zo digored.

Abars nemeur koulzkoude kals goad ' vezo skulled,  
Ha setu c'houi ho-unan dalc'hed ha chadenned ;  
Rag ar Roue Herodes, eur fallakr kuruned,  
'Vit plijout d'ar Juzevien d'ho klask en deus kassed.

D'ar maro na vezot ket lakeat c'hoas en dro-ma,  
Rak eun Eal abers Doue a deu d'ho tiboania ;  
Hag hoc'h ereou neuze, 'vel pa vijent torred,  
A gouez timad d'an douar, hag e c'hellit tec'het.

Varzu Rom, kear benn ar bed, e kerzit heb dale,  
E Rom e tivoan d'ho mouez kals kristenien ive ;  
Hag eus a Rom var ar bed, pell goude ho maro,  
Sklerijen an Aviel skedus c'hoas a baro.

Abenn daou vloas varn-ugent, e Rom eur fallakr all,  
An impalaer Neron, da c'houde enn tan-gwall  
C'houezed ganthan he-unan, 'vit kloza he dorfed  
A laka puill da redek goad an dud vadezed.

A-hed ar stourmad skrijus ne fallgalonit ket,  
Eur guir sturjer na ouffe na krena, na tec'het ;  
Ha dre eur burzud nevez, var goad ar verzerien  
E saw etrezek an env eun eozt a gristenien.

Chadenned oc'h adarre ha da vervel barned  
Var eur groas, ho penn d'an traon 'vel m'oc'h eus goulenned ;  
Mervel a c'hellit breman, ha mont daved Jezus ;  
Ar c'houeriad a c'hell paouez, pa vez bet eost founnus.

Ar c'hantvedjou hag an dud, an eil goud ' eguile  
A dremeno niverus, heb na c'helfent morse  
Diskar Ilis Jezus-Krist, na lemel he Vikel ;  
Ar Pab a c'hell chanj hano, ar Pab n'ell ket mervel !

Evel ar skoulm burzudus a skoulmas hoc'h ereou,  
Eus an eil Pab d'egile, a-dreuz ar c'hantvedjou,  
Dorn Doue a skoulm gant ners chaden ar virionez ;  
Penaoz ' chelfe he dispenn ar gaou hag an erez ?

Klevit breman hor peden, hor Patron evurus,  
Grit ma vezimp-ni ive guir ziskibien Jezus ;

Diouallit mad hor spered dioc'h ar falz kredennou,  
Dioc'h peb hudurnez ive mirit hor c'halonou.

Bennigit hor bugale, ha pellait diouzomp  
Gwalen ar skol dizoue a venn skei ac'hanomp ;  
Hon harpit er stourmad-ma enep ar vuntrerien  
A glask laza ho eneou, mouga ar feiz kristen.

Kenta Vikel Jezus-Krist, Porzier ar Baradoz,  
Grit ma kerzimp difazi var roudou hon tud koz ;  
Ha pa c'houlennimp digor diganeoc'h en Envou,  
Grit m'hor silaouo Jezus, hor Mestr hag hon Aotrou.

H. C.

Imprimañur :  
*Kemper, eil a viz gouere 1913.*

A. COGNEAU,  
V. G.

